

KEMM AR POUEZ-MOUEZH

E peb pennad da-heul eh eus ur memez frazenn. Hervez ar c'henarroud e vo red deoc'h chañch ho taol-mouezh.

1- « Yann zo bet dibabet evid boud prezidant ar gompagnunezh, abalamour d'e ampartiz. Hel lâret em boa deoc'h dija, ha m'hel lâr deoc'h arre : ur paotr kabidan, ur paotr fiskal eo Yann ! »

2- « Arsa 'ta ! A-zevri-kàer e rit hoc'h amñod ha ne glaskit ket kompren ma c'homzoù ! Hel lâret em boa deoc'h dija, ha m'hel lâr deoc'h arre : mar ne gasit ket an traoù da benn ar wezh-mañ, e voc'h boutet er-maez ! »

3- « Evel bemdez em eus labouret er memez lec'h, debret douzh ar memez taol, gwelet ar memez tud. Hel lâret em boa deoc'h dija, ha m'hel lâr deoc'h arre : divlaz abominabl eo ma buhez, dijoa ha dijourdoul ! »

4- « A-c'houde c'hwec'h miz e pellgomz din tàer ha gourdrouzuz. War-greiz-an-deiz e rod e-tal ma zi. E-kreiz an noz e ta da skoiñ douzh ma dor en ur zivegiñ kunujoù. Hel lâret em boa deoc'h dija, ha m'hel lâr deoc'h arre : n'on ket evid añdur ar vuhez-se kén ! Eñv am lazho ! »

JCLR.
2016a.2026a.